

# Krampouez pardon Plouared

*D'ar Vreuriezh Keltiek*

C'hwi oll, Bretoned a Bariz,  
A 'n em dastum eur wech ar miz,  
'Vid komz euz Breiz-tzel, ar vro  
A garfet beteg ar maro.

Kredet penaoz em-eus keuz braz  
Dre m'on dalhet amañ, siwaz !  
Ha n'hallan bezañ en ho touez  
Hag ober deoh kleved ma mouez.

Hogen, ma spered en ho kreiz,  
War an avel a deu a Vreiz,  
A nijo skañv, - tra vurzuduz !  
Hag e vin ganeoh evuruz !

Ouspenn a zo, ha mar karet  
Kaoud lod a bardon Plouared,  
A zo hirie, hag euz a-bell  
Kleved ha gweled Breiz-Izel,

Setu amañ krampouez-gwiniz,  
Krampouez pardon, hervez ar hiz,  
Greet gant bleud gwiniz, lêz, viou.  
Debret peb a-unan pe diou.

Ar gwiniz er park a zavas,  
Ha gand an heol a zarevas,  
Ha pa oe medet, war ar skourr,  
Evnedigou a gane flour.

Eur vuoh vriz 'roas an amann,  
Ivez al lêz, fresk ha gwenn-kann,  
Greet gand yeot ha gand bleuniou  
Ar parkou hag ar menezioù.

Hag ar viou, eur yarig wenn  
O dozvas, war zolier ar foenn,  
Leh m'he-devoa he neiz kuzet ;  
Med dre he han eo bet kavet.

Hag ar hrampouez a zo bet greet  
En Keranborn, en Plouared,  
Gant eur vatez koant, eur plahig  
A gane laouen eur zonig.

Debret 'ta, paotred, ma hrampouez,  
Ha neuze e saovfet ho mouez  
Evid kana meulodi Breiz,

Ha soñjed enni, noz ha deiz.

O Breiz-Izel ! o kaera bro !  
Koad en he hreiz, ha mor en-dro,  
N'eus ket a gaeroh bro er bed,  
Ha dreist-oll da garin bepred !

*Plouaret, miz gouere 1879.*

*(1) Lennet el Lein keltieg, en Pariz, d'ar 14 a viz gouere 1879.*